

BN3-3-007

KANTIKOU

— EVIT AN —

MISIONOU HAG AR REVDRENOU

TENNET EUZ

Kantikou Brezonnk

ESKOPTI ZAN-BRIEK HA LANDREGER



ZAN-BRIEK

MOULETE TI RENE PRUD HOMME

Mouler an Eskopti

INDULJANS VRAS, GOUDE AR GOMUNION.



O Jezus douz ha mad meurbed,
 setu me stouet d'an daoulit diragoc'h,
 ha gant ol ners ma ine, me bo ped bag bo ped c'hoaz
 da lakat don em c'balon
 santimancho kreno a fe, a esperans bag a garante,
 gant eur gwir geun d'am fet bejou,
 hag ar volante ar muan start d'en em ziober dioute,
 breman pazeuan, gant eur garante vras bag lae bar em ine,
 da deurel eur zel a spered war bo pemp goult,
 ha da zonzal enne ganin ma unan,
 o kaout dirag ma daonlagad
 ar pec a lare ar profed David, diouzoc'h, o Jezus mad
 pa lahee gwechall ar c'bonze-man en bo keno :
 Toulet o deus ma douarn ha ma zreiz,
 Kontet o deus ma ol eskern.

Induljans vras ar goude ar gomunion, pa larer ar beden-ze a
 c'heno-hag a galon war an daoulit, en eur zellet ouz eur c'hrusid.
 — Red eo ive laret 5 Pater ha 5 Ave. evit hon mam zantel an Ithz.

Induljans ar Maro Mad, da c'hoñd adaleg breman

D'ye eur c'hras kaer roet gant hon Tad Zantel ar Pab Pi X. peb
 kristen a c'hall breman goñd raktal Induljans vras ar Maro
 Mad. An induljans-ze, eur wech goneet, a dalveo d'an ine pa
 vo o vont dirak Doue, gant ma varyo, en stad a c'hras. — Vit
 goñd an induljans-ze e flier kovosat, komunia ha leret a
 c'heno-hag a galon ar beden-man :

O ma Doue, heus fors pesot maro e plijo ganac'h rei
 din, adaleg breman me hen digemer a volante vad hag
 a greiz kalon eus ho torn, me hen digemer gant e ol
 anken, e benijen galat, hag e ol boanion

KANTIKOU

EVIT AR

MISIONOU HAG AR RETREJOU

(1) N^o 2. — Speret-Zantel.

WAR DON : Venez, venez, *Espri-Saint*, N^o 2.

1. Speret-Zantel, ol ners ar bed kristen,
 Plijet genac'h enomp breman disken :
 A sklerijen karget hon sperejou,
 A garante tomet hon c'halonou.
2. An Ebestel en eur zal unanet.
 A dan ho kras ec'h euz gwejal devet ;
 Bet evidomp ar memes madeles,
 Na n-omp heb-oc'h nemet zempladures.
3. Gwerches Vari, esperans ar pec'her,
 Pedet Jezuz h' Mab hag hon Zalver :
 Obtenet d'imp kompren komjoy Doue
 Ha da viken o miret goude-ze.

N^o 4. — Ofromp d'an Env.

WAR AN TON ANAVET, N^o 4.

1. Ofromp d'an Env ar zakrifis,
 Na n-euz netra a gen kaer priz
 Evel Jezus stag ouz e Groaz,
 War an Oter o tiskan c'hoaz.
2. En Oferen, e gwirione,
 Korf ha goad Jezus Mab Doue,
 Elec'h ar bara har ar gwinn
 Aman diragon a welin.
3. Gant ar belek me a fel d'in
 Kinig ive an Oan divin
 Vit adori vel m'eo dleet
 An tri Ferson euz an Dreindet.

(1) An n^o dirag pep kantik eo n^o ar c'hantik-ze barz ar levr bras
gant notenou.

4. Vit *trugarekat* hon Otrou
Euz kement a vadelezou,
Warnon ha war an ol skuillet,
Aboe ma n-euz krouet ar bed.
5. Vit *gouten pardon* digantan
Euz ar pes a zisplij-dezan
Enon hag en ol bec'herien,
Euz hon c'hrimou, euz hon ieinien.
6. Vit ma c'hado bemde enomp
Grasou da grenvat ac'hanomp
Eneb ar c'hig, an drouk-speret,
Hag eneb ar bed miliget.
7. Ofr a ran c'hoaz ar Zakrifis
Vit hon Mam zantel an Ilis :
Ma trec'ho dre-ol er brezel
Gret a beb tu d'an Avie!
8. Breman-zouden, o ma Zalver,
E tiskenfet war an oter ;
Karget a fe grenv ma ine,
Ha ma c'halon a garante.
9. Ha c'houi bet zonzj, Gwerc'hes Vari,
Ec'h euz hen ganet vidomp-ni,
Tolet warnezan ha warnon
Eur zel a vam, zel ar galon.

N° 5. — D'ar Goureou

WAR AN TON N° 5.

1. Me ho salud, korf ma Zalver
Zo diskenet war an Oter :
Enoc'h ar bara zo chanchet,
Ha ganac'h e vezin maget.
2. Me ho salud, o Goad divin
Zo er c'halis-ec'h ar gwinn ;
C'houi ewidon zo bet skuillet,
Deut d'am goalc'hi a bep pec'het.

N° 8. — Zakramant an oter.

WAR DON : O l'auguste Sacrement, N° 8.

1. O Zakramant ar c'haeran
Lec'h teu Doue d'hon magan ;
Jezus a zo aman c'hoaz
Kouls ha gwejal war ar Groaz.
2. D'an Ebestel e lare
Ha d'ar veleien goude :
« Heman eo ma c'horf, debret,
Heman eo ma goad, evet. »
3. Ar belek, er goureou,
A lar ar memes komjou :
Kenkent ha ken alies
Jezus a zent ouz e vouez.
4. N'an euz ken war an oter
Nemet Korf zakr hon Zalver :
E gik, lec'h ar bara-kân,
Lec'h ar gwinn, Goad pur an Oân.
5. Ar spesou a n-euz miret
O liou, o blaz 'vel hepred ;
Kuzet euz-se didane
Eman Korf ha Goad Doue.
6. Diez a vefe kompren...
Kredi a dleomp hepken :
Digoromp lagad ar Fe,
Hag e welfomp hon Doue.
7. Jezus en daou spes a zo,
Den ha Doue war-eun-dro :
'N e bez er spes a vara,
Er spes a win memes tra.
8. Dont a ra d'hon ilijou
Hep kuitat lein an Envou :
Er burzud-ze e welomp
Pegeit e kar ac'hanomp.
9. Neb enem gav e goal stad
Hag a gred velkent tostet,

A gomet eun torfet braz
Henvel ous hini Judas.

10. Neb a resev e stad vad
Korf hon Zalver hag e Voad,
Gantan a zo unanet,
A galon hag a speret.
11. O kristenien, adoret
Jezus ouz e Groaz staget ;
Adoret-han en Envou
Hag en e dabernaklou.
12. E peb lec'h, e peb amzer,
Meulomp Jezus, hon Zalver ;
Dreist ol karomp anezan
Er Zakramant ar c'haeran ! Amen.

N^o 13. — O ! na hir eo an noz.

WAR AN TON N^o 13.

1. O na hir eo an noz, pegouls e tei an de,
Ma'z in da zigemer Jezus ma c'harante !
O na hir eo an noz !... etc.
2. Dihun ha zav, ma c'horf, deomp da ga-
[vet Jezus,
Me glev ouz ma gervel e vouez karantezus,
Dihun ha zav..., etc.
3. Pegouls e vin arru, o hent na hir out-te !
War lein ho tiouaskel, Elét, ma douget-me.
Pegouls e vin..., etc.
4. O ma c'halon em c'hreiz, bez leun a levene,
Gwelet a ran erfin ti zantel ma Doue.
O ma c'halon..., etc.
5. O illis beniget, hast digor d'in an or
Ma redin da gavet ma Jezus, ma zensor.
O illis beniget..., etc.
6. Diwar dreujou ho ti Jezus, ho saludan,
Eur pec'her evel d'on a diefe chom aman...
Diwar dreujou..., etc.

7. Me ho salud ive, zent hag elet eurus,
A zo en illis-man tro-war-dro da Jezus.
Me ho salud ive..., etc.
8. Tabernakl alaouret, te zo tron ma Roue,
Setu me d'an daoulin dirag e vajeeste...
Tabernakl alaouret..., etc.
9. Jezus, me hoc'h anav dre zaoulagad ar fe :
C'houi welan-en Hosti, ma Zalver, ma Doue !
Jezus, me hoc'h anav..., etc.
10. Diskenet, o Jezus, euz an oter breman,
E diabars ma c'halon, diskenet d'am magan.
Diskenet, o Jezus..., etc.
11. Jezus a zo genin ha me zo gant Jezus,
Nemet er Barados netra ken dudius.
Jezus a zo genin..., etc.
12. Pelloc'h, o ma Jezus, c'houi hepken a garin,
Dalc'hamad em ezomou c'houi hepken a
Pelloc'h, o ma Jezus..., etc. [glaskin.

N^o 14. Deut ol ha deut gant fe.

WAR AN TON N^o 11.

1. Deut ol ha deut gant fe,
Deut d'ar banket presius ;
Galvet oc'h gant Doue
Da zibri ouz tol Jezus,
Jezus !
Barados an ine
Eo chom genac'h noz-de.
2. Mar deziret madou
Aman ema an tensor
Pehini ho rento
Pinyikoc'h evit ar mor,
Jezus !
Perc'hen an ol vadou
Ha mest an ol c'hrasou.

3. An aour hag an arc'hant
Na n-int nemet paourente
E kichen ar prezant
A ofr d'imp ol Mab Doue,
Jezus !
A ro d'imp e ol vad
Evit hon pinvikat.
4. E Gorf, Goad hag Ine,
Ebars en hosti kuzet
Gant e Zivinite
A vezo meuz ar banket,
Jezus !
Ha c'hoaz, pec'her divad
Na brizes ket tostet !
5. M'hen gwel war an Oter,
Devet gant ar garante,
O c'hortes ar pec'her
Evit toman e ine,
Jezus !
A c'houlen hon c'halon
Evit bezan e dron.
6. Goude poaniou ken braz
Gouzanvet war ar C'halvar
A n-euz deurveet c'hoaz
Chom genimp war an douar.
Jezus !
Evit magan bemde
Hon c'horf hag hon ine.
7. Ol zent euz an Envou
Prestet d'in ho karante,
Reit d'in ho kalonou
Evit karet ma Doue
Jezus !
A glask disken enon
Dre ar gomunion !
8. Mes alas ! pa zonzjan
Penez am euz offanset
Ar mignon ar gwelan
Hag ar fidelan pried,
Jezus !

- Gant glac'har em c'halon
E c'houlenan pardon !
9. Nan, na veritan ket,
M'hen anzav gant gwirione,
Goude bezan pec'het,
Dibri bara an ele
Jezus !
C'houi eo ar zanteles
Ha me eur pec'her-kez !
 10. Enor da virviken
E zakramant an Oter
D'an Doue a zisken
Dindan spesou ken dister,
Jezus !
Ra vo dre-ol meulet
Ha gant an ol karet !

N^o 14. — Elet euz ar Barados.

WAR AN TON ANAVET, N^o 14.

1. Elet euz ar Barados, zellet pebes enor
A ra d'imp er Zakramant Jezus hon Redemptor :
Eur wej evit hon prenan ec'h eo bet inkarnet,
Hag evit dont d'hoñ magan genimp e choñ bepret !
2. Mari, gwir Vam da Jezus, Mari ma Mam dener,
Ma zikouret da resev ho Mab ha ma Zalver :
Me na n-on ziouas netra, netra nemet pec'het,
Mes enoc'h ec'h esperan; o ma Mam beniget.
3. Krouer an Eny, an douar, war an oter bemde,
Dre goms nerzus ar belek a zisken a neve ;
Eun Doue kalz hueloc'h evit ar firmamant,
Enem izela didan spesou ar zakramant.
4. Eun Doue na chanj james epad an ol amzer,
Eun Doue war bal e zorn a doug ar bed antier,
Enem lez gant ar belek da vezan diblaset
Evit disken e kalon ar paouran euz ar bed !
5. O mirakl ar zouezusan e-touez ar miraklou,
O burzud na hell kompren ar c'haeran sperejou :

- Evit gont kalonou ho vugale ingrad,
O maget, o ma Jezus, gant ho Korf hag ho Koad !
6. Nan, evit eur mab unik ar vam an deneran,
Biskoaz na zantas kement ho c'halon o toman !
Goude ken braz karante pion a helfe refus
Konsakri e ol galon d'ho karet, ma Jezus ?
 7. Mar d-eo dister kalonou ar gent hag an ele,
Evit karet eun Doue ken dign a garante,
Penos e prizet, Jezus, dre ar gomunion,
E kalonou ken sklaset dont da ober ho tron !
 8. Penos kredi azeau ouz tol zakr eun Doue,
Goude bezan offanset, kement e vajeete ?
D'ho taoulagad, ma Zalver, na hellomp prezanti
Nemet kalonou zionas ! leun a ingrateri !
 9. Koulskoude pa omp galvet da vont ol d'ar banket,
Dre eur gomz a drugare effaset hon fec'het :
Teuet sklaz hon c'halonou gant tan ho karante,
Leun a joa hag a fiars e tostaimp neuze.
 10. Pebes eürustet breman pa zantin em c'halon
Jezus o vevan genin evel eur gwir vignon :
Et ine gant ma ine pelloc'h enem vesko,
Gant ma goad em izili e pad pnr a redo.
 11. Prestet d'in ho tiou-askel, ma El-mad zoursius,
Ma ninjin evel eur goulm ctre divrec'h Jezus ;
Me rei dezan ma c'halon, hen rei d'in e hiul,
Gantan me a repozo e peoc'h ha dizoursi.

N^o 9. — Aktou kent ar Gomunion.

WAR DON : *Gwerches Vari c'houi phint zo*, N^o 9.

1. Me gred ferm hep doutans ebet
Ech an da resev en efet
Jezus gwir den ha gwir Doue,
Er zakramant a garante.
2. Doue, leun a berfekcion
Me ho kar a greiz ma c'halon ;
Ma nesan a garan ive
Abalamour d'ac'h, ma Doue.

3. Allaz, allaz, petra on-me
Da dostat ouzoc'h, ma Doue,
Ne n-on nemet eur pec'her kez,
Mes c'houi zo leun a vadeles !
4. Ah ! pebes dezir am euz-me
Da resev bara an ele !
Dizec'han ran gant ar zec'het
O c'hortos monet d'ar banket.
5. Gwerches, c'houi ech euz hen roet
Er c'hraou gwejal d'ar bastoret :
Euz ho torn me fel d'n ive
Digemer ma Zalver hirie.
6. Eur zel c'hoaz, eur zel a drue,
O ma Jezus, war ma ine,
Arog antren goalc'het enon
Kement a ra poan d'ho Kalon !

N^o 21. — Meulomp ol da james.

Ton N^o 21.

Diskan.

Meulomp ol da James,
Doue leun a vadeles, } bis.

1. Kanet ele, d'hon Otrou
Ho kantikou kaerañ,
Bemiget anezan
Genimp euz e ol c'hrasou.
2. Biskoaz tad na oe gwelet
Ken mad d'e vugale,
Ken zoursius noz-de
D'o dioual korf ha spere.
3. Pastor karantek meur bet
Na espern ket e boan,
Klask a ra heb ehan
An danvad kez dianket.
4. Lamet a n-euz an anken
A ziwar ma spere.

Tre'h d'ar c'hig ha d'ar bed,
Toret a n-euz ma chaden.

5. Ma rentet a n-euz pare
Evel eur medisin,
Hag e vanket divin
A zo beyans ma ine.
6. Skuil a ra gant abundans
E c'hras breman warnon ;
E goelet ma c'halon
A n-euz gret e zemeurans.
7. Hen eo ma finvidiges
Ma nerz ha ma skoazel :
Rak-se bete mervel
Me gano e vadeles.

N^o 22. — Meulomp e peb amzer.

TON N^o 24.

Diskan.

Meulomp e peb amzer }
Kalon Jezus hon Zalver. } *bis.*

1. Me ho meul, o ma Jezus,
C'houi ec'h euz ma c'hrouet,
C'houi ec'h euz ma frenet,
C'houi am mag, o ma Jezus.
2. Mil benos d'ac'h, o Jezus,
C'houi a zo ma fastor,
C'houi a zo ma zensor,
C'houi zo ma di vad, Jezus.
3. Pec'het am euz, o Jezus,
Alies em bue :
C'houi ec'h euz bet true
Ouz ma stad, o ma Jezus.
4. Ma ine paour, o Jezus,
Genac'h zo bet goalc'het,
Koant eo breman meurbet
Dre ho kras, o ma Jezus.

5. Ma zikouret, o Jezus,
Ar rest euz ma delou,
E kreiz ma ol boaniou
Bet genin, o ma Jezus !
6. Hastet, hastet, o Jezus,
Terri ma chadenou :
Na pegouls an Envon
Ho meulin, o ma Jezus !
7. Ra vezo meulet Jezus,
Dre-ol, da bep mare !
Ni bemnos ha bemde
Meulomp ol, meulomp Jezus !

N^o 24. — O Kalon zakr.

WAR AN TON ANAVET, N^o 24.

1. O Kalon zakr euz ma Jezus,
Kalon meurbet karantezus,
Plijet resev, me ho suppli,
An dezir am euz d'ho meuli.
2. C'houi zo ar zoursen bresius
Euz ar grasou kreny ha nerzus
A resevan da bep mare
Hag a douch kement ma ine.
3. O Kalon zakr, c'houi zo eun or,
Hag a welan bepret digor,
Da zigemer ar bec'herien,
Pa fel d'he ober pinjen.
4. Bet on, ziouas ! o ma Zalver,
Dianoudek en ho kenver :
Zellet ouz ma ine ingrad,
Distrei a ran a galon vad.
5. Torret am euz lezen Doue
Kant ha kant mil gwej em bue :
Muntrer euzus, bugel divad,
Treyzet am euz Kalon ma Zad !
6. Pastor mad, c'houi, ec'h euz klasket
An danvad a oe dianket,

Setu-hi o c'houlen pardon,
Digoret dezi ho Kalon.

7. Stouet ol betek an douar,
Hon c'halon rannet gant glac'har,
Kriomp gant eur vouez truezus :
Pardon, pardon, Kalon Jezus !
8. Pardonet d'imp-ni kristenien
An diegi hag ar iemien
Hon euz bet ouzoc'h, keit amzer,
Er zakramant euz an Oter.
9. Pardonet c'hoaz an torfejou,
An dismegans, ar blasfemou,
Gret eneb d'ac'h gant ar re-fal,
Ken goaz hag er C'halvar gwejal !
10. Me garfe gant ma goad goalc'hi
Ma malis, ma ingrateri :
Da vianan me o gouelo,
Betek en-heur euz ma maro.
11. Ouspen-ze en hoc'h ilijou
Gant doufians e rin pedenou :
Ha lies er gomunion
E tigorin d'ac'h ma c'halon.
12. An Oferen c'hoaz a glevin
Kel lies gwej ha ma hellin :
Eno c'h ofrin genac'h d'ho Tad,
Ho Kalon bey ha leun a voad.
13. Ho pet zont ive, ni ho ped,
Euz kalon ho Mam, bet treuzet,
En harz ar Groaz gant seiz kleze
Dre an ners euz he c'harante.
14. Unanomp breman hon monejou,
Ha laromp dre hon c'hantikoù :
Gloar d'ho Kalon, Zalver Jezus,
Gloar d'ho Kalon, Mam drnezus !

N^o 32. — An Ave maris Stella.

WAR AN TON N^o 32.

1. Ni ho salud, stereden vor,
Mam da Zoue, leun a enor,

Gwerc'hes bepret, dor an Envou,
Chilaouet ouz hon pedenou.

2. Resevet ar zalud zantel
A rez d'ac'h an el Gabriel ;
Reit eur peoc'h ferm d'imp er bed-ma,
O chanj an hano a Eva.
3. Toret chaden ar bec'herien,
D'ar re zo dal reit sklerijen ;
Pelleit ouzimp peb drouk dalc'hamad,
Goulenet d'imp an ol draou vad !
4. Diskoët ez oc'h eur Vam vad
En andret an dud emzivad ;
Gret m'hon chilaouo an hini
Ec'h euz ganet evidomp-ni.
5. Gwerc'hes dispar e peb feson,
Dous dreist an ol, glan a galon,
Gret ma vimp divlam a bec'het,
Dous evelloc'h ha pur bepret.
6. Gret ma vo zantel hon bue,
Ha zur hon hent trezeg Doue,
Ken a vimp, o welet Jezus,
En hon gwir vro genac'h eürus.
7. Gloar ato d'an Tad eternal,
D'ar Mab ha d'ar Speret-Zantel,
D'an tri Ferson euz an Dreindet
Ar memes enor zo dleet. Amen.

N^o 34. — Ar Salve Regina.

WAR AN TON N^o 34.

1. Ni ho salud, Rouanes an Ele,
C'houi zo hon Mam, ar Vam a drugare,
Hon ol douster, bue hag esperans,
Ni ho salud, gant kalz a reverans.
2. D'ac'h-hu, Gwerc'hes, e kasomp hon feden,
Ni diyfoet ha ziousas ! pec'herien :
Ouzoc'h, Gwerc'hes, e kriomp er bed-ma,
Ni pere zo bugale da Eva.

3. D'ac'h-hu bepret e tenn hon c'halonou,
D'ac'h e kâsomp hon goelvan, hon dae-
Hon flans-ni zo en ho madeles. [rou ;
En draouien-man leun a dristidiges.
4. Rak-se pa 'z oc'h hon avokades ker,
En hon andret bepret dous ha tener,
Plijet genac'h distrei ho taoulagad
Warnomp-ni ol tud paour hag emzivad.
5. Pa deui an de da guitat ar bed-man,
Raktal goude hon hirvoud divezan,
Diskoët d'imp, Mam vad ha truezus,
Er Barados, bizaj ho Mab Jezus.
6. O Gwerc'hes zakr, meurbet karantezus,
O Gwerc'hes dous, meurbet trugarezus,
Ni ho suppli, klevet ouz hon feden,
Hon diouallet breman ha da viken !

AR ROZERA

N° 35. — Ar pomb Mister a Joa.

WAR DON : *Eun Doue hepken adori, N°35.*

1. Zonjomp d'ar gentan dizenes
Er joa en devoa ar Werc'hes,
Pa voe gant an El zaludet
Da vezan Mam Zalver ar bed.

Diskan.

Ave, Ave, Ave Maria, etc.

2. En eil mister zelomp Mari
O kuitat he bro hag he zi
Evit gwelet Elisabeth,
A douge zant Ian beniget.
3. En drede mister, hon Zalver
Zo ganet en eur c'hraou dister,
Hag a lavar d'imp distagan
Hon c'halon euz traou ar bed-man.

4. Er bevaret-mister joaüs
Ar Werc'hes gant he Mab Jezus
Enem ofr en Templ evidomp ;
Gant-he da Zoue nem ofromp.
5. Er bempet mister, ar Werc'hes
A gavas goude tri devez
He Mab e kreiz an doktoret,
Leun a furnes hag a speret.

N° 36. — Ar pomb Mister a C'hlac'har.

WAR DON : *O Kalon Zakr, N° 24.*

1. Ar c'hentan mister truezus,
A ziskoe d'imp glac'har Jezus
Beuet en eur hoezer a voad.
Ha stouet o pedi e Dad.

Diskan :

O Kalon Zakr euz ma Jezus,
Kalon meurbet karantezus,
Plijet resej, me ho suppli,
An dezir am euz d'ho meuli.

2. D'an eil mister e oe freuzet
E gorf zantel a doliou fouet ;
Evit hon pec'hejou mezus
Ec'h andur eur boan ken euzus.
3. Eur gurunen sperm war e ben,
Etre e zaouarn eur gorzen
Eur gos vantel endro dezan,
En drede mister a welan.
4. Jezus, er bevaret mister,
A doug e Groaz dre ruiou ker,
Hag a gouez teir gwej d'an douar
O vont etrezeg ar C'halvar.
5. Er bempet mister, Mab Doue
A ro evidomp e vue ;
Piou a vezo c'hoaz ken ingrad
Da offansi Jezus ken mad !

N^o 37. — **Ar pamb Mister a C'hoar.**

WAR DON : *Ni ho salud Stereden, N^o 32.*

1. Er c'hentan mister gloriuz,
Kanomp meulodi da Jezus :
Zavet eo bet dimeuz ar be,
Herve e gomz, goude tri de.

Diskan :

- Ni ho salud, stereden vor
Mam da Zoue, leun a enor,
Gwerc'hes hepred dor an Envou,
Chilaouet ouz hon pedenou.
2. Jezus en eil mister a c'hoar,
A deu da guitat, an douar,
Zevel a ra d'ar Barados ;
Eno ema ouz hon gortos.
 3. En drede mister me a wel,
Er zâl war ben an Ebestel,
Ar Spered-Zantel o tisken
Da rei d'he nerz ha sklerijen.
 4. D'ar bevalet mister, Mari,
E kreiz ar joa, ar veulodi,
Korf hag ine a zo douget
D'ar Barados gant an Elet.
 5. D'ar bempet e oe kurunet
Mari hon Mam gant an Dreindet :
En Env breman, dirak Doue,
N'ankouao ket he bugale.

N^o 42. — **Kantik zant Gasimir, roue.**

WAR ANTON N^o 42.

1. O ma ine, kanomp bemde
Da Vari meulodiou :
Hec'h oberou, hec'h ol bue
A zo leun a vuzudou.

Diskan :

Gloar da Vari ha meulodi,
Pebés burzud evurus !

Mari, Gwerc'hes ha Mam ive,
Gwerc'hes ha Mam da Jezus !

2. Teod an den zo gwal dister
Evit komz euz a Vari :
Mes he c'halon a zo tener,
Ol e hellomp he meuli.
3. Euz a Vari an ol hobliou
A denn gloar ha sklerijen,
He zanteles, he vertuiou,
A zo skouer ar Gristenien.
4. Klevet he mouez d'imp o laret :
« Zentet, zentet ouz Jezus,
« 'Nhoc'h ol bue mar hen karet
« Jezus ho rento eürus. »
5. Kalonou zec'h ha glac'haret,
Deut da gavet ar Werc'hes ;
Gant Mari e ver konfortet
Er vrasan tristediges.
6. C'houi pec'her paour, reit a galon,
Peden, enor da Vari :
Evit obten gras ha pardon
Laket ho fians en-hi.
7. C'houi den devot, n'ankouaët ket,
Ema Mam an ol c'hrasou :
He zerviji hag he c'haret
Eo kemer hent an Envou.
8. O Mari klevet ma feden,
Pareet ma gouliou :
En ho krasou reit d'in loden
Ha peurs en ho vertuiou.
9. Evidomp ol dirag Jezus,
Pedet, Mam a drugare ;
Finves ar bed a vo spontus,
Ouzimp bezet zonj neuze.
10. Da Jezus ar Mab eternal,
En amzer Mab da Vari,
D'an Tad ha d'ar Spered-Zantel,
Gloar, enor ha meulodi !

N^o 49. — Kalon dous a Vari.

WAR DON KANTIK LOURDES, N^o 49.

1. Kalon dous a Vari,
Kalon Mam Doue,
Ni fel d'imp ho meuli,
Breman ha bemde.

Diskan :

Ave, ave, ave Maria,
Ave, ave, ave Maria.

2. Pion a helfe laret,
Kalon druezus,
Pegement e karet
Bugale Jezus ?
3. C'houi ec'h euz hen gwelet
'N eur c'hraou evidomp,
War ar plouz astenep
Ha paour eveldomp.
4. Genac'h e Nazareth
Ho krouadur zantel
A n euz bet labouret,
Da rei d'imp kentel.
5. War ar C'halvar neuze
Pebes kalonad !
Dirago'h pa skuille
Evidomp e voad !
6. 'N e gomjou divezan,
Zonj ec'h euz Gwerches,
E lare d'ac'h bezan
Mam an oll dud kez.
7. Eur Vam a galon vad
Dreist an oll mammoù
En hon henver dalc'hamad
Ez oc'h en Envoud.
8. Spontet omp ar wej-man
Mui eget biskoas,
O welet disprizan
Jezus hag he groaz.

9. Ar bed a n-euz ezom
'N eun amzer ken kri
Euz eur galon ken tom
Ha Kalon Mari

10. An Ilis hag ar Pab
'N ho trezeg a zell,
Digant Jezus ho Mab
Pa c'houlont skoazel.

11. Chilaouet ouz o mouez,
Komzet ouz Jezus,
Ma vouge en hon touez
Ar brezel mezus,

12. Ar brezel didrue
A rer a bep tu,
Eneb ar wirione,
Eneb ar vertu.

13. Roet ners ha zouten
D'imp ivez e Breiz,
Ha miret da viken
Ar Fe vad 'n hon c'hreiz !

K. G.

N^o 6. — Enpad miz mae.

TON ZUL FASK.

Diskan.

Bemde bemnoz hag en pep ti
Meulomp Mari.

1. Pegen kaer eo ar c'hantiko
Pegen evruz ar paroujo
Pa lavar an oll galono
Meulomp Mari.
2. Kristenien deut d'an ilizo
He-man eo miz ar c'hantiko
Klevet a rer en oll broio ;
Meulomp Mari.
3. Plijet gan-ac'h, zent hag ele,
Unani ho mouez gant hon re

Hon c'han a vo kaeroc'h neuze.
Meulomp Mari.

4. Ni zo da Vari konsakret,
Da Vari ni vezo bepred
Kanomp eta gant joauzted :
Meulomp Mari.
5. Kals a doug respet da Vari,
Ha kals ho deuz flanz en-hi
Aman an oll a zo d'ezhi.
Meulomp Mari.
6. Hirie, Rouanez an envo
Pijet digemer hon veuo,
Ni a r. d'ac'h hon c'halono.
Meulomp Mari.
7. Mari, war an ele renet
An anaon deuz ar boan tennet
Torret oll nerz an drouk-spered.
Meulomp Mari.
8. Mari repu en peb mare
Mam dous bepred d'ho pugale
C'houi hon c'hondno da Zoue
Meulomp Mari.
9. Mari, n'ellomp kaout pardon
Na trec'hi an dentasion
Nemed dre ho proteksion
Meulomp Mari.
10. Hep Mari na ver ket zalvet,
Gant Mari na ver ket kollet,
Mari, ni a vo d'ac'h bepred.
Meulomp Mari.

N° 68. — Zant Josep, Pried Mari

WAR DON : Jezus, Zalver adorabl, N° 19.

1. Zant Josep, pried Mari,
Tad mager da Jezus,
Ni fell d'imp noc'h enori,
Patron karantezus.

Diskan : Zant Josep, etc.

2. Mirer choazet gant Doue
D'he Vab na d'ar Werc'hes,
Bet ec'h euz en ho pue
Anken ha levenes.
3. Evit digemer Jezus
N'ec'h euz na tap na ti :
Mes ho kalon zo eurus
O tont d'hen adori.
4. Pa glask Herodes Jezus
D'hen lakat d'ar maro,
Gant pebes fe burzudus
Hen kaset da Bel-brô !
5. Pebes poan ! epad tri de,
Jezus a zo kollet :
Pebes joüstet goude,
Jezus ec'h eus kavet !
6. Ho labour a n'euz maget
Ho Krouer, Mab Doue,
En ho labour Mest ar bed
Ouzoc'h-hu a zente !
7. War an douar trubuillet,
En Envou war ho tron
C'houi zo galloudus meurbet
Ha tener a galon.
8. Jezus a bleg d'ho peden
Vel e Vam, ho pried :
Hastet eta d'in goulenn
Ar c'hras ma vin zalvet.
9. Pa vin galvet gant Doue
Patron ar maro mad,
Deut, gant eun dorn a drue
Zerret ma daoulagad.
10. Tost d'ac'h ha tost da Vari,
E kichen tron Jezus,
Neuze me iei d'ho meuli,
O ma Patron' etrus.

N^o 70. — Kanomp ol meulodi da Jozep.

WAR DON AN N^o 21.

Diskan.

Kanomp ol meulodi
Da Jozep, pried Mari.

Piou a hello ho meuli.

Zant Jozep evurus.

Tad mager da Jezus.

Pried d'ar Werc'hes Vari.

2. An hini a oe spontel.

Pa zeuas en he zi

Eun et d'he zaludi

Ho kemeras da bried.

3. War ho tivret h' beniget.

Ec'h euz douget Jezus.

War ho kalon joatis

Ped gwej en deuz han kousket-l.

4. Roue an ol rouanet.

Ouzoc'h-hu a zente.

Ha gwir Mah ho Toue

Genac'h a zo bet maget.

5. An Doue ol galloudus.

Didan ho ti kuzet.

En deuz ho zikouret.

En ho labouriou poanius.

6. Bet ec'h euz en ho puer.

Ziouas kalz a boaniou.

Mes pa skuillec'h daerou.

Dorn Jezus o dizec'he.

7. Ha pa zeujoc'h da guitad.

Eur bed ankenius.

Gant Mari ha Jezus

Oe zerrret ho taoulagad.

8. Dreist ar zent hag an etel.

Tre Mari ha Jezus.

War eun tron lugernus.

C'houi a zo breman zavet.

9. Troet eta no sellou
Ouzomp ho pugale,
Ha bete tron Doue
Plijet kas hon fedenou.

10. O zant braz evidon-me
Eur c'hras a c'houlenan.
Deut em heur divezan.
Da zigemer ma ine.

11. O ma Zad karantezus.
Gret ma tei ho pugel
Eveldoch da vervel
Etre Mari ha Jezus.

12. Jozep, Mari ha Jezus,
Bezet genin bepret.
Ra varvin 'n eur laret
Hoc'h hanoion d'udius.

13. Goude-ze, en ho kichen.
En Envou azeet.
Gant ar zent hag etel
Me ho meulo da viken.

(Daou-ugent de induljans abeure an O. Eskob a Z. - Brick),
Tennet euz *Leur Bugale Mari.*

N^o 76. — Mam an Itron-Varia.

WAR AN TON N^o 76.

Diskan.

Enor, enor da zantez Anna
Meulomp, meulomp ar Vam ar wella.

1. Hanvet hoc'h bet a belzo
Patrones Breiz-Izel,
Hag a viskoas en hon bro
D'ac'h ez omp bet fidel.

2. Vel hon zud koz bretonet,
Hon fiars ar vrasa
Enoc'h a lakomp bepret,
Itron zantes Anna.

3. Zellet e-tal eur c'havel
Ar vam-ze daoulinet :
Pedi ra vit he bugel
Zantes Anna-Wenet.
4. Ar c'hlanvour, gant an derzien
Dalc'het war e wels,
D'ac'h en deuz gret eur beden;
Hag a zo deut pare.
5. War ar menez e Breiz Izel
Pa c'hoanter disknizan,
Ouz en Env e rer eur zel
O tont ol da ganan :
6. Selaouet war ar mene
Ar mesaer o kana :
Ho meuli a ra
Itron zantes Anna.
7. Ar zoudard kez er brezel
A bed zantes Anna ;
Ha pa vezo red mervel
E tel c'hoaz da gana :
8. Setu ar mor o kroza...
Daoulinet, martelod,
Da bedi zantes Anna :
Hi ho kaso d'an od.
9. War eur mor leun a rec'hier.
Omp zlouas er bed-ma !
Difouallet hon bag dister,
Itron zantes Anna.
10. Bugale gez da Eva
Ni a glask hon gwir vro :
O Itron zantes Anna,
D'an Env c'houi hon reho.

Tennet euz *Levr Bugale-Mari.*

N^o 83. — Tremen ra peb tra.

WAR AN FON N^o 83.

Diskan : Parce Domine.

1. Selaou, ma breur ker,
Tec'hel ra an amzer,
Tremen ra peb tra ;

- Ners, madou, iec'het,
Iaouankis lia genet,
Tremen ra peb tra. (bis).
2. Skeuden da vuc
Eo al lestr o vale ;
Tremen ra peb tra ;
E rondou er mor,
A gloz kentis digor ;
Tremen ra peb tra. (bis).
3. Deiou presius,
Grasou gwelan Jezus,
Tremen ra peb tra ;
Eur wej tremenet
Endro na zeuont ket,
Tremen ra peb tra. (bis).
4. Tud skanv ha distur
A glask ar blijadur ;
Tremen ra peb tra ;
Fenez o tansal,
Warchoaz er be tenval,
Tremen ra peb tra. (bis).
5. Tud a zo tentet,
Da stourm na baouzet ket ;
Tremen ra peb tra ;
Rin vo d'ar brezel ;
Chomet eta fidel,
Tremen ra peb tra. (bis).
6. Ber eo peb devez,
N'eo ket hir ar vuez,
Tremen ra peb tra.
Klaskomp hep dale
Zovetat hon ine,
Tremen ra peb tra. (bis).
7. Kant mil vla amzer
A zo c'hoaz goal dister :
Tremen ra peb tra ;
Nemet c'houi Done,
Hag an eternite,
An eternite ! (bis).

(Tennet eur *Kantikou Kemper ha Leon.*)

N^o 82. — Poent braz eo d'ac'h, pec'her.

WAR AN TON N^o 82.

Diskan.

Poent braz eo d'ac'h, pec'her,
Distrei ouz ho Salver,
Poent braz eo d'ac'h, pec'her,
Distrei ouz ho Salver,

1. Penoz vid eur blijadur dister
A gaver ebars ar pec'het,
E tilestec'h Doue ho Krouer,
Hag e heulfec'h an drouk-speret !
2. Hen eo ho Mest leun a vadeles,
Hen a vo ho Parner ive,
Hag ec'h euz c'hoaz an hardieges
Da derri e lezen, bemde...
3. Zellet fallagries hoc'h ine,
Gouelet dru war ho pec'hejou,
Hag euz ol dechou fal ho pue
Fraillet raktal ar chadenou.
4. Mar ec'h euz kerzet bete breman
En henchou ledan ar pec'het,
Enem gavet en danjer brasan,
Ha koulskoude na grenech ket !
5. En eur stad ken trist, ken ankenius,
Tolet eves war hoc'h ine :
Dirag an-dud oc'h beo ha joaus,
Ha c'houi maro dirak Doue !
6. Ah ! mar teufe, hep mui hoc'h espern,
Ar maro d'ho skei koulskoude,
E konesfe noch ine en ifern,
Ha c'hoaz na zonzet ket en ze !
7. Penos bezan ken diskiantet
Diwarben an fan eternal,
Da bini e vefet kondaonet
Mar chomet er pec'het marvel !

8. Ah ! pegen paour, pegen dal ez oc'h,
Ha perak hunvreal ken pel,
Dent eo ar c'houlz eürusan vidoc'h,
P'ema Doue ouz ho keryel.

9. Na skuizet ket ar basiantet
Nag ar vadeles a Zoue :
Rak zur-mad e vefet kastiet
Mar-disprizet e vomez hirie.

10. Gant eur gwir glac'har d'ho pec'hejou,
Dent buan eta d'he gavet :
E zorn a Dad zo leun a c'hrasou,
A dra zur n'ho revuzo ket.

N^o 85. — Doue, gwir Bried.

WAR AN TON N^o 85.

Doue gwir bried
D'an ineou,
C'houi c'h euz ma c'hrouet,
C'houi c'h euz ma frenet,
C'houi c'h euz ma c'hrouet,
Vit an Envou !

Diskan.

Gwerc'hes beniget,
Mam! druezus,
Me eo 'm euz lazet,
Hen gouzout a ret,
Me eo 'm euz lazet
Ho mab Jezus.

Aboe pel amzer,
— N'hellan ket nac'h —
Ez on, ma Zalver,
Ziouas ! eur pec'her,
Ez on, ma Zalver,
Enebour d'ac'h.

Eur bugel tec'het
A di e dad.

Eun danvad kollet
Ha pel dianket,
Eun danvad kollet,
Euzus e stad !

Ia, me a zo bet
Bete breman,
Ah ! ken aheurtet
Ebars ma fec'het,

Ah ! ken aheurtet :
Chanj a renkan !

Pignomp, ma ine,
War ar C'halvar,
Gwelomp eun Doue,
Leun a garante,
Gwelomp eun Doue
En e c'hlac'har.

E dreit zo treuzet
Gant an tachou,
E gorf dispennet,
E ben kurunet,
E gorf dispennet
Gant ar fouetou.

Zell-han diwisket,
Zavet er groaz,
E zaouarn staget,
E goste toullet,
E zaouarn staget
Gant tachou braz.

Me eo, ma Doue,
Me ma-unan,
Am euz hep true
Dre ma goal vue,
Am euz hep true
Kresket ho poan.

Me wel pardonet
Ar mab prodig,

Meur den a bec'het,
Eur plac'h dirollet,
Meur den a bec'het,
Eul laer publik.

C'houi a zo bepret
Eur gwir Zalver,
Ha na c'houlet ket
E ve den daonet,
Ha na c'houlet ket,
Koll ar pec'her.

D'ho treit e pokan,
Gant Madalen,
Re e talean,
Re-bel e talc'han,
Re e talean
Ma finijen.

Genet koz ibepret,
Bepret neve,
Poënt eo ho karet,
Zalver beniget,
Poënt ho karet
E gwirione.

Arru eo an de
Da gonsakri
Ma ners, ma bue
D'ac'h, o ma Doue,
Ma ners, ma bue
D'ho serviji.

Diskan :

- O ma Jezus ! o ma c'harante,
Bezet em c'halon, ha bemnoz ha bemde.
2. Ma Jezus, c'houi zo mad, c'houi a zo trugarezus.
Ma Jezus, c'houi zo dous, c'houi a zo karantezus.
 3. Bete breman ar bet zious ! enem abuzet
Gant afferiou ar bed ken e oan-gante-dallet.
 4. Mez breman, ma Jezus, me a ro d'ac'h ma ine
Ma c'horf ha ma c'halon vit ar rest euz ma bue.
 5. O pebes karante ec'h euz-hu bet, ma Zalver,
Da vezan bet skullet ho koad evit ar pec'her ?
 6. Goude mervel vidomp er Groaz war lein ar C'halvar,
E chomet c'hoaz genimp d'hon magan war ann douar !
 7. Pegen euzus eta, pegen fol eo ar pec'het,
Pa n-euz lazet Jezus ma Redemptor beniget !
 8. O pec'het miliget, birviken-mui n'am zrec'hi,
N'am bezo ken ouzid nemet heuz ha kasoni !
 9. Pegouls e wellin-me an ol oc'h ober brezel
E pevar c'horn ar bed d'an ol bec'hejou marvel !
 10. Koulskoude, ma Jezus, paour ha zempl evel ma z-on,
N'hellan ket pell mont eun mar na renet ac'hanon.
 11. Evit heuilh ho lezen ha plegan ma gval-dechou,
Am euz ezom bemde euz ho nerzusan grasou.
 12. Gret eta, m'ho suppli, d'in ma-unan ma varvin
Hag evidoc'h hepken em ol amzer ma vevin !
 13. N'am euz ken, o Jezus, c'hoant ebet war an douar
Nemet ma veritin mont davedoc'h en ho kloar.

N^o 12. — Eun dezir braz am euz.

WAR AN TON ANAVET, N^o 12.

1. Eun dezir braz am euz da virviken da garet
Jezus gwir Vab Doue, ha ma Zalver beniget.

N^o 87. — Chillaouet gan spont hag eston.

WAR DON N^o 87.

1. Chillaouet gant spont hag eston
Kentel ar Rufe Zalomon,
Skrivet-hi don en ho speret,
Ha biken pec'het na refet.

2. Ol, emezan, renkomp mervel,
Pa blij gant Doue hon gervel :
Ha raktal monet dirak-han
Da glevet hon zetans gant-han.
3. Meur a zen a gol e ine
Ha na rafe ket mar zonje
Pegen ber eo ar vue-man,
Pegen tost an de divezan.
4. Ar c'horf na glask dre e natur
Netra nemet ar blijadur :
Ha koulskoude zouden, hep mar,
Ec'h ei da vreinan d'an douar.
5. Gant aon eta na zilentfe
E siou fal war hoc'h ine,
Kustumet-han dre binijen
Da blegan d'al lezen gristen.
6. Ar c'horf n'en eo met eur mevel
D'ho serviji bete mervel :
N e renk izel mar n'hen dalc'het,
En ifern gantañ e kouesfet.
7. Ar bed ive zo ken trestour
Hag eur planken war lein an dour :
Fiout en-han zo goal riskus,
Daoust d'e zellou flour ha hoarzus.
8. Gevler a lar da hep hin,
Mont a ra betek prometi
Eürustet, iec'het, hir vue,
D'an dud erru war vord ar be l.
9. Dastumet madou an ne
Hag e veset pinvik eun de :
Madou ar bed, ol eur bern,
Na n'int nemet moget ha spern.
10. Eur gos lisel, pevar flanken,
Eun dorchon blouz didan ho pen,
Setu hepken peza chomo,
Genac'h-hu goude ho n aro.
11. Nag a vech'haouank pe bugel
N'et ket da gredi bevan pel :

- Ar veret a zo leun a dud
Skoet hep true kreiz o brud.
12. Eur wej maro ha zebeliet
Beteg ho pe c'hroui vo douget
Ho kerent eno ho lezo
Hag a dei d'ar ger war-o-zro.
 13. Piou a zonjo neuze enoc'h,
Ha piou-a bedo evidoc'h ?
Poaniet eta bevan erfad
Keit ha ma hellet labourat.

N^o 89. — Ar Varn gentan.

WAR DON N^o 88.

1. Zonjomp, o kristenien, ha zonjomp e gwirione,
Goude 'r maro raktal e vimp barnet gant Doue.

Diskan :

- Gwerc'hes Vari, ma Mam leun a drue,
Gret d'in doujan ar varn keit ha ma'z on e huc.
2. Na vo ket c'hoaz zerset d'hon c'horf kez e zaoulagad,
Ma klevimp ar Barner o c'hoar bemen d'imp tostet.
 3. Neuze hon ine paour stravillet ol gant ar spont,
Hep gallout nem guzan a dleo rentan e gont.
 4. Eul leor a zigoro a skrivomp en-han bemde
Hon euvrou fal pevad, dre ma reomp aneze.
 5. E diabars hon ine e lennimp hou fec'hejou,
Nemet ar re goalc'het gant pinijen ha daerou.
 6. Pegen hir al listen evit an dud na glaskont
Nemet o blijadur er bed-man pad ma vevont !
 7. Na zant nag el eno na zibedo d'hon difen,
An Env a vo bouzar ha didalye ar beden.
 8. Mes ar gwir zervijer a ledo dirag e Vest
An tensonou gantan medet en amzer an est.
 9. Eur zetans a glevimp a vue pe a varo,
Hag hon stad goude-ze da virviken a bado.

10. Pep hini ac'hanomp kenkent a tel d'e dachen,
Gant ele pe diaoulou a deuo d'e ziarben.
11. Kals war hent an Envou a daleo eun neubet,
Ken na vint bet en tan euz poplir ar bed dieubet.
12. Pegen fur eo eta neb a gerz eun'er bed-man,
O karet a galon e Grouer hag e nesan !
13. Skubet euz hoc'h ine dre eur govizion zantel
Ar fank euz ar pec'het pe ho techou fal gret brezel.
14. Tremenet peb devez evel pa renke bezan
Ar fin euz ho peaj hag ho devez divezan.
15. N'euz fors pegouls neuze e tel Doue d'ho kervel,
Abred pe divezad, prest a vefet da vervel.

N^o 132. — En han' Doue hon zikouret !

WAR DON N^o 132.

1. Allaz ! na oufe den kompren
Pegen estlam eo hon anken :
Hon finij a zo kalet,
En han' Doue hon zikouret
Diskan.
Breuder kerent, ha mignonet,
En han' Doue hon chilaouet,
En han' Doue hon zikouret.
2. A bep tu d'imp n'euz nemet tan,
Tan war c'horre, ha tan didan :
C'houi hon euz-ni kement karet,
En han' Doue hon zikouret !
3. Zonjet en ho tad, en ho mam,
Er Purgator, e kreiz ar flam :
Ma mab, ma merc'h, ah ! chilaouet,
En han' Doue hon zikouret !
4. Ni n'hellomp ket dre bedenou
Distan na berrat hon foanion ;
Doue ouzomp na chilaou ket,
En han' Doue hon zikouret !

5. Da bevan hon dle da Zoue
Evidomp-ni pedet bemde,
Gret aluzen, mar hon c'haret,
En han' Doue hon zikouret !
6. Kalz a hellet dre ho poanion,
Hoc'h iuniou hag oferenou :
Ken didrue na vezet ket,
En han' Doue hon zikouret !
7. Ha pa vezimp e gloar Doue,
Evidoc'h ni bedo ive :
Ouzomp eta, ol chilaouet,
En han' Doue hon zikouret !

N^o 92. — Ar Barados.

WAR AN TON ANAVET, N^o 92.

Jezus pegen braz e
Plijadur an ine
Pa vev e gras Doue,
Hag en e garante !

Bêr kavan an amzer
Hag ar poanion dister
O sonjal de ha noz
E gloar ar Barados.

Pa zellau en Envo,
Etrezek ma gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmik wen.

Gant joa e c'hortoan
An termen divezan,
Hast am euz da welet
Jezus ma gwir bried.

Kenkent ha ma vezo
Torret ma chadeno,
Me a zavo en er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar gloar,
Dreist an heol, ar stêret,
Me a vezo douget.

Pa vin uz d'an douar,
Traouien leun a c'hlae'har,
Neuze me rei eur zel
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Dezi me a laro :
Kenavo d'id, ma bro,
Nag a daerou skuillet
Enoud, bro veniget !

Kenavo da viken,
Paourente hag anken,
Kenavo pec'hejou,
Trubuil ha klenvejou !

Pelloc'h na zoujin ket
Ardon an drouk-speret :
Netra ken n'am sponte
Goude tol ar maro.

Goude tol ar maro
 Joaüs me a gano ;
 Torret eo ma chaden,
 Libr on da virviken !

A bep tu pa zellin
 Kement tra a welin
 A rei d'am daoulagad
 Ha d'am c'halon mill vad.

Doriou ar Barados
 Digor ouz ma gortos,
 Ar zent, ar zentezet
 War^o zron azeet.

Me vo digemeret
 E pales an Dreindet
 E kreiz an enoriou
 Hag ar meulodiou.

Me hello, evit mad
 Gwelet Doue an Tad
 Gant e Vab eternal
 Hag ar Speret-Zantel.

Me a welo Jezus,
 'N eur c'hoarzi dudiüs,
 O lakat war ma fen
 Eur gaer a gurunen.

Pegen dous vo klevet
 E vouez d'in o laret :
 « Deut, zervijer fidel,
 « Deut, d'ar gloar eternal.

« Euz beret an ilis
 « Hö korf, bev war e giz,
 « Aman, hep pel dale,
 « A vo douget ive.

« C'houi zo em Barados
 « Evel eur blantenn roz,

« A zivleun d'ar mare
 « Hag a vleun adare.
 « Evel eul hilen
 « Ken kaer en he zae wen
 « E kornik eul liors,
 « Ez oc'h e kreiz ma fors. »

Evit poaniou dister,
 Evit ankeniou ber,
 Me a vo pevet mad
 Gant Doue ma gwir Dad.

Kaer a vezo gwelet
 Ar Werc'hes beniget
 Gant daouzek stereden
 A ra he c'hurunen

Gwelet a rin'ouspen,
 Renket e nao vanden,
 Ele hag ar'hele,
 Ol o veull Doue ;

Adam hag e bried,
 An ol batriarchet,
 Kouls hag ar brofetet,
 Tud a-goz kurunet ;

An ebestel eürus,
 Gant diskibien Jezus,
 Hag an ol verzerien,
 Enor ar gristenien.

Tud zalvet a bep bro
 A welin c'hoaz eno,
 Gante ma zadou koz
 Pelzo ouz ma gortos,

Gwerc'hezet a bep oad,
 Zentezet a bep stad,
 Groage, intañvezet
 Er bed-man disprizet.

Bugale hep niver
 Tro-war-dro d'o Zalver
 Gant zae o badeiant
 O ninjal skanv ha koant.

Eürustet hep he far,
 A vremen me ho kar,

Enoc'h dal ma sonjan
 Divec'h enem gavan.

Em ol boaniou kalet
 A gorf hag a speret
 Me zonjo de ha noz
 E gloar ar barados.

N^o 95. — Ar vue gristen.

WAR DON N^o 95.

1. Setu aman d'ac'h eur reglen
 Evit bevan e gwir gristen.
Diskan. Gwerc'hes Vari, ma zikouret,
 Da heuill lezen Doue bepred. (bis).
2. Pa zihunet euz ar beure
 Offret ho kalon da Zoue.
3. Kenkent oc'h zavet ha gwisket
 Gret ho pedenou, daoulinet.
4. Klasket da gentan gloar Doue
 E kement a ret pad an de.
5. Na chomet morse dibreder,
 Re bresius eo an amzer,
6. Pelleit euz goal-gompagnunes,
 A laz ineou ken lies !
7. Laret raktal ma vec'h tentet :
 Jezus, Mari, ma zikouret !
8. Dreist an ol draon enem viret
 Euz ar pec'het ez oc'h techet.
9. Ho pet zonj ! ar fotou bianan
 A doug ember d'ar re vrasan.
10. Na laret mui leou-douet
 Na komjou brein ha goloet.
11. Er groaz, Jezus pa c'houzanve,
 Daoust d'e ol anken a dave..
12. Peb kristen a die c'hoaz dioual
 Da zrouk-koms ha da zrouk-zonjal.

13. Eur vez a vefe d'ac'h dispriz
Breiz-Izel, ho tud, hoc'h ilis.
14. Na guita ket eur gwir Vreton
Hep na ve rannet e galon...
15. Gant tud an ti, ol war-eun-dro
Bemnos ho peden c'houi laro
16. Nêuze lennet a vouez uhel
Buez ar Zent pe 'n Aviel.
17. Goulet pardon kent ho repoz
Acun na varvfech epad an noz.
18. Heuillet d'ar zul an ofis u,
Oferen-bred ha kousperour.
19. Zantel eo ar zul war e hed,
N'eo ket de an diaoul nag ar bed.
20. E zakramant ar Binijen
Bep miz enem voalc'het a-gren,
21. E peb mare hag e peb stad,
Pedet ar Werc'hes hon Mam vad.
22. N'ankouaët ket lagad Doue
Warnoc'h digor hed ho pue.
23. Ouspen, herve lezen Jezus,
Bezet d'an nesan truezus.
24. Gant an nesan euz ma refet
Jezus a rei en hoc'h andret.
25. Zonjet er varn hag er maro,
En ifern, en Env hon gwir vro.
26. Honnes bepret a vo reglen
Neb a vevo e gwir gristen.

N^o 96. — Karet Doue da gentan.

WAR DON N^o 96.

1. Karet Doue da gentan,
Ma inc,
Karet Doue da gentan :
Er poaniou, er joa, hed oc'h ol bue,
A galon bezet gentan. Karet, Doue, etc.

2. Disprizet madou ar bed
Miliget,
Disprizet madou ar bed :
N'int netra nemet Indu ha moget ;
Ar pinvik eo neb a bed. Karet, Doue, etc.
3. List ar goal-blijaduriou,
A dremen,
List ar goal-blijaduriou :
Luiet a vefec'h en o chadenou,
Ha gante dallet a-gren. Karet, Doue, etc.
4. C'houi breman zo war ar mor
Houlenus,
C'houi breman zo war ar mor :
Etrezeg an-Env, a-zeün ha joaüs,
Et arog, daoust d'e fulor. Karet, etc.
5. Doue a rei d'ac'h zikour
E c'hrason,
Doue a rei d'ac'h zikour :
Ember a vo fin d'hoc'h ol drubuillou,
Ha trec'het hoc'h enebour. Karet, etc.
6. Eürs a vefet eun de :
'N e bales,
Eürs a vefet eun de :
Lod e po en e ol binvidiges
Pad an ol eternite. Karet, Doue, etc.
K. G.

N^o 97. — Fe hon tud koz.

WAR DON N^o 97.

1. Ar Vretoned 'n o enezen
Pelzo amzer a voa kristen :
Rog dont en Arvor hon tud-koz
A gare Jezus en Bro-Zoz.
Diskan.
Fe hon tud-koz, o Fe zantel,
C'houi vo bepret Fe Breiz-Izel !
Nac'h hon Doue ! kentoc'h mervel,
Kentoc'h mervel, kentoc'h mervel !

2. Hon zent a ie, a dreuz ar mor,
Da welet Per war e gador ;
Goude keit amzer stag e chom
Hon c'halon ouz ar Pap a Rom.
3. Ar-Pab a Rom, abeurs Doue,
D'an ol a lar ar wirione ;
D'an ol c'hoaz e tiskouez an hent
A zo bet pleustret gant ar zent.
4. Dre Vreiz-Izel pa oe skignet,
Mesk Arvoris, ar Vretonet,
Nag a chapel 'n o bro neve
E peb tachen zavet gant-he !
5. Lein ar menhir, lein ar mene,
Kroaz hon Zalver a lugerne ;
War o daoulin endro dezl,
Tud a vanden oc'h adori !
6. Daoust d'an amzer ha d'ar re-fal
Ar Groaz e Breiz a zo divral ;
Ar Groaz e Breiz, uhel ha zonn,
A chomo keit hag ar mor don.
7. Meur a wej goad ar Vretonet
Abek d'o Fe a oe skulilet ;
Hon merzerien gant hon tud-koz
A zo breman er Baradoz...
8. Hon tud-koz a hed evidomp
Zikour gante pa c'houlenomp ;
Zantes Anna o Fatrones
A zel ouzimp gant madeles.
9. Ni kouls evel hon gour-dadou
A zo da Jezus hon Otrou ;
Gret goap ouzimp neb a garo,
Ni vo kristen bev ha maro !

K. G.

N^o 101. — Eürus an hini a garo Doue.

WAR DON : Na n-euz ket e Breiz, N^o 58.

1. Eürus an hini a garo Doue
Euz e ol galon hag e ol ine. (bis).

2. An den a blijo da Zoue hon Tad
A zo diouallet ha diouallet mad. (bis).
3. En ti hag er park, en deiz hag en noz,
Doue warnezan a skuillo benoz. (bis).
4. Gantan e bried hag e vugale
A n-efo o lod e benoz Doue. (bis).
5. Evel eur wezen, douret he griziou,
Dougen a rei frouez, deliou ha blenniou. (bis).
6. Mar d-eo pinvidik e rei vad d'ar paour,
E zorn a vo prest bepret d'hen zikour. (bis).
7. Mar na n-euz danve, a n-euz kals gwelloch :
Eur galon-tac'hus, gnan ha leun a beoc'h. (bis).
8. Deuz c'houezen e dal e febr e vara,
Goude zin ar groaz, hep klem a netra. (b.).
9. Laouen er vüe, laouen er maro,
Gant an ele-mad d'an Env e pigno. (bis).
10. Evidout, pec'her, n'ec'h euz da c'hedal
Nemet buc trenk-hag eur maro fal. (bis).
11. Pec'her, deuz en dro, deuz eta buhan,
Rak ganid dija emä c'houez an tan ! (b.).
12. Kemer heb dale hent ar Baradoz,
Pe, m'hen lavar d'id, te gavo malloz. (b.).
(Kantikou Kemper ha Leon).

N^o 103. — Jezus a lar d'imp pedi.

WAR DON N^o 103.

Diskan.

Zavet eta, ma ine,
Pignet bete, tron Doue ;
Ar beden a rei dac'h diouaskel grenv,
D'ho tougen, uz d'an oabl, e lein an Env.

Bepret e fteer pedi.

1. Jezus a lar d'imp pedi
Bepret, kuit a zihan ;
Outan e fel d'in zenti,
Eürus on pa bedan !

Ar beden mintin ha noz.

2. Dal ma strink ar sklerijen
E *pedan* d'ar heure ;
D'an noz, en devalijen
E *pedan* adare.

Ar beden en Ilijou zantel.

3. *Pedi* ran en Ilijou,
Tal an Oter 'stouet,
Oe'h adori hon Otrou
A chom eno kuzet.

Ar beden e peb tachen.

4. N'euz fors pelec'h nem gavan,
E ker pe war ar mez,
A greiz kalon e *pedan*,
Dirag an ol hep mez.

Ar beden e-pad al labour.

5. Pa ve kalet al labour,
Lec'h touet pe damant,
Stank e *pedan* d'am zlkour
Jezus, bet artizant.

Ar beden dre gan.

6. Lies e *pedan* izel,
Lies enem blijan
O kanan a vouez uhel
Ma c'hantikou kaeran.

Ar beden er poantou.

7. Pa goez warnon klenvejou,
Pa zemplan gant an nec'h,
Ar *beden* eo ma louzou,
Ar *beden* am divec'h.

Ar beden hag an euvrou.

8. Ners a ro d'in ar *beden*
Da garet ma nesan
Herve al lezen gristen,
N eur ober vad d'ezan.

Ar beden hag ar baourante.

9. Lezel a ran gant ar bed
E arc'hant hag e aour ;
Ar pinyikan, mar na *bed*,
E gwirione zo paour !

Ar beden hag ar Werc'he .

10. *Ma feden* dre zorn Mari
Da Zoue ve kaset,
He mouez wardro ma hini
Gant Doue ve klevet.

Ar beden hed ar vue.

11. Dalc'hamad, keit ha ma hellin,
E peb oad, e peb bro,
Evel breman e *pedin*
Beteg heur ar maro.

Ar beden hag ar varn.

12. Dirak ar Barner kenkent
E redin hep krenan :
Rak, goude *pedi* kement,
Deut mad a vin gantan !

K. G.

N° 123. — Dougomp hon c'hroaz.

WAR DON N° 123.

1. Eleiz a dud a gav kalet
Klevet Jesus o lavaret :
« D'ac'h hoc'h unan hemde marvet,
« Douget ho kroaz ha ma heuillet ! »
2. Kaletoc'h c'hoaz a vo klevet
Pez a laro d'ar re daonet :
« Tud miliget, et pel ouzin
« Kreiz an tan na n-euz ket a fin ! »
3. Hogen breman mar chilaouet,
Kentel ar Groaz ha mar zentet,

C'houi neuze a vezo dizoan
Euz an ifern hag euz e dan.

4. En ho rog Jezus he dougas,
Ha zoken out-hi e varvas ;
N'helfec'h ket tanvat e joaou
Hep kemer lod en e boaniou.
5. Balcet keit ha ma karfet,
Netra dre ar bed na welfet,
A ve d'an den ken talvoudus
Evel ar Groaz warlerc'h Jezus !
6. Ar poaniou korf hag ar c'hlenvet,
Ha mui c'hoaz ar poaniou speret,
A zo peb hini aneze
Eur groaz roet d'imp gant Doue.
7. En ti, er porz, hag e ped oad,
Kroajou vo war ho kein dalc'hammad,
An aour na lam ket aneze
Euz a balez ar rouane
8. Mar ho douget en espet d'ac'h
Goal drist eo an doare genac'h,
Kals poneroch eo deut ho pec'h,
Ha lec'h profistan c'houi a bec'h.
9. Bue Jesus-Krist a zo bet
Eur verzerenti hed ha hed,
Ha na glasket en hoc'h hini
Nemet plijadur ha dudi !
10. Mar ve bet tra war an douar
Gwelloc'h eget poan ha glac'har,
Reit en dije d'imp hon Zalver
E kement-se kentel ha skouer.
11. Komz Jezus a chomo bepret,
Skrivet-hi don en ho speret :
« Ret eo mont dre hent ar poaniou
« Da rouanteles. an Envou. »
12. Er bed-man an etrusan c'hoaz
Eo an den e gemer e groaz,
O trei war Jezus e zellou,
Hag o kerzat en e roudou !

Kantik Breuriez ar Fe.

Breudeur ni glev ho klemmo deuz an tu all d'ar mor
D'ho mouez ha d'oc'h ezomo hon c'halon zo digor,
Ni a roio aluzen evit zikour ho pro,
N' a zavo beleien ha d'ac'h ni ho c'haso.

C'houi pere zo kristenien, ha na glevet-hu ket
Eur voez zo leun a anken e pevar c'horn ar bed ;
Chilaonet oll hon feden, hon c'hlemmo truezuz
Chilaouet petra c'houlen ho preudeur maluruz.

Kristenien a Vreiz-Izel ho pet true ouz-omp
Ar joazted eternel, an env a c'houlennomp
Rag ni zo war an douar tud paour hag emzivad,
N'anaveomp, c'houi hen goar, na Jezuz nag he Dad.

Gwejjall pell diouz skerijen, pell diouz lezen Doue
Er memez tevalijen ho pro a oa ive,
Mil benoz d'an ebestel a neuz ho kelennet,
Gret kement-all tud fidel breman en hon andret.

C'houi breman zo evuruz p'oc'h euz ar sklerijen
Hag eur fe ken zoneuz, — ho pro a zo kristen, —
Hag ar sklerijen gaer-ze n'oufe biken kouean
Mar deuet dre 'r garante en ho touez d'he magan.

Mar neuz Jezus promettet penoz n'ankoaje ket
Eur werenad dour roet d'ho preur en he zec'hed,
Petra dalvo, kristenien, ar gwennek binniget
Gant pini da virviken ineo vo prenet.

Ah ! Doue da rei kalon, nerz d'ar misioner,
Joa ha konsolasion en he boan ha mizer,
D'ac'h ive benoz Doue, d'ac'h-hu oll kristenien
A ro gant gwir volonté ho gwennek d'hen zouten.

Deut eta, beleg iaouank, kuiteet bro, mam ha tad
Daoust d'an daero puill ha stank a skuill ho taoulagad,

Deut zao-du Breiz-Izel hast a memp d'ho kwelet
prezeg an Aviel en bro ar baianed.

En fleuren ho iaouankiz kals aman renk mervel,
Med ho ine a c'hone ar yue éternel,
Roujo o zreid biniget chom merket en hon bro,
Ra denio c'hoaz Bretoned, kals c'hoaz hanval out-ho.

Tud fidel, a wir galon, o welet ho foanio
Zikouret hon mision, zavet d'imp ilizo
Digaset ar skol gristen d'imp ha d'hon bugale,
Ni bedo evit goulen war-n-oc'h benoz Doue.

Ha c'honi misionerien, ganet en Breiz-Izel
Gant ar maro diskaret en kreiz ar broio pell,
Deuz ar baradoz pedet vit Breuriez ar fe,
Goulennet ma chomo stard en Breiz-Izel ive.

Donezono ar Spered-Zantel.

TON : *Breudeur na glev ho klemmo.*

De ma c'honfirmasion, de a joa d'am c'halon,
Ar Spered-Zantel a deu gant he seiz donezon
Deuz an enno em ine evit ma c'honfortin,
O de mil gwej evuruz l' biken n'az t'ankoain.

A bep sort fallagriez ar bed a zo karget,
Dre-oll war hent ar yue he becho zo stignet,
Pe na ro d'am daoulagad nemet fals klerien,
Roet d'in, Spered-Zantel, ho furnez d'am c'helen.

Hi a rei d'in anveout gant gwir anoudegez,
Petra dal treo an douar vit ma zilvidigez,
Hi a rei d'in labourat vit jerviji Doue
Ha bevan en esperanz da vont d'an env eun de.

Vel eun treust em daoulagad, zioqaz d'in, ar pec'het
Am c'harz da welet erfad pez ec'h euz diskleriet,

Reit d'in eta, ma Doue, reit d'in ho sklerijen
Vit ho c'hridi, ho c'hompren hag ho heuill pen-da-ben.

Ma spered sklerijennet gant sklerijen Doue
A welo ar wirione ken skler evel an de
Mad an ine a gaven dister a diagent
A vo istimet gan-in vel ma oa gant ar zent.

Furoc'h adaleg breman, me heuillo an hent mad
Rag gant ar Spered-Zantel evit se am euz kad
Skiant ar wir garante, skiant ma deverio,
Ar skiant-ze hanvet mad skiant treo an envo.

Hep dale ma spered paour, zentuz ouz ho skient
A zavo war-zu an env, krog mad on gant an hent,
An drouk-spered nag ar bed breman n'am zrompoint ken,
Pa meuz bet digant Doue e Spered vit ma ren.

Evit ma zilvidigez ha skouer vad ma nesan
Am euz-me ezom dalc'had ho kuzul da gentan,
Dreiz-hi me dizoloo ar skoasello zo gret
Vit ma c'holl gant an dud fall ha gant an drouk-spered.

C'houi laro d'in gwell vit den en pe stad ma bue
A gle bean tremened vit heuill ho polonte,
Piou eveld-oc'h-hu a hell rei d'in ar stum gwellan
Da ober pep tra d'he goulz ha d'hen zantifian.

Enebourien ma ine evel eur mor diroll
Hep paouez na noz na de a glask an tu d'am c'holl,
D'ho zrec'hi, Spered-Zantel, ho nerz d'in a zo ret,
Gant-hi nag a ven tentet, na vin biken trec het.

Breman gant ar brasan joa ma bue a roin
Kentoc'h evit nac'h ma fe, mar be goulet gan-in
Na grenin ken gant ar spont dirag ar waperien,
Me vo krenv d'anzav ma fe evel ar verzerien.

Ma Doue gret d'in tanva ar gwir devosion
Gret ma ielo war grisli bepred en em c'halon,
Neuze vel eur bugel mad ouz-oc'h e vin zentuz,
Me ho servijo dalc'had kontant hag evuruz.

Gant-hi mo evit Doue eur garante dener
 Hag ouz ma nesan e vin bepred dous ha zeder,
 Dreiz-hi, bemnoz, bep beure, a ielo ma feden
 War nij beteg tron Doue evel eur goulmik wen.

Me zo dreiz-hon ma-unan gwall douget d'ar pec'het
 Ha war hent ar baradoz am euz poan o kerzet,
 Laket eta 'n em c'halon ho toujanz d'am zikour.
 Da diwall deuz ar pec'het ma gwasan enebour.

Breman vel eur bugel mad e vevin 'n ho oujanz
 Ho karin a greiz kalon, c'houi ma nerz, ma fianz,
 Ma c'halon baour a zo leun a anoudegez-vad
 Rag pen-kentan ar furnez am euz bet evit mad.

Teurveet, o ma Doue, kuruni an de-man
 'N eur rei ho kwellan benoz da gement omp aman
 Reit ho pennoz d'an Eskob a neuz hon c'honfirmet,
 D'hon oll madoberourien, kerent ha mignonet.

Deuz fonz hon c'halonigo eur voez zav ive
 Klemmuz vel ar glaz ho ped da zellet a drue
 Ouz an anaon er flammo dizec'het o c'hortoz
 Ar c'houiz d'ho kwelet hep fin en gloar-ho paradoz.

F. G.

Ave verum Corpus natum de Maria Virgine.
 Vere passum, immolatum in cruce pro homine.
 Cujus latus perforatum fluxit atqua et sanguine.
 Esto nobis prægustatum mortis in examine.
 O Jesu dulcis ! O Jesu pie ! O Jesu Fili Mariæ,
 tu nobis miserere. Amen.

O salutaris Hostia,
 Quæ cœli pandis ostium,
 Bella premunt hostilia,
 Da robur fer auxilium.

Uni trinoque Domino
 Sit sempiterna gloria,
 Qui vitam sine termino
 Nobis donet in patria.
 Amen.

Ave maris stella.

- | | |
|--|---|
| 1. Ave, maris stella,
Dei Mater alma,
Atque semper Virgo,
Felix cœli porta. | Qui pro nobis natus,
Tulit esse tuus. |
| 2. Sumens illud Ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Hevæ nomen. | 5. Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culy is solutos,
Mites fac et castos. |
| 3. Solve vincla reïs,
Profer lumen cæcis,
Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce. | 6. Vitam præsta puram,
Iter para tutum,
Ut videntes Jesum,
Semper collætetur. |
| 4. Monstra te esse matrem,
Sumat per te preces, | 7. Sit ians Deo Patri,
Summo Christo decus,
Spiritus Sancto,
Trius honor unus. Amen. |

Inviolata, integra, et casta es, Maria. Quæ es effecta
 fulgida cœli porta. O Mater alma Christi charissima.
 Suscipe pia laudum præconia. Quæ nunc devota fla-
 gitant corda et ora. Nostra ut pura pectora sint et
 corpora. Tua per precata dulcisona. Nobis concedas
 veniam per secula. O Benigna ! O Regina ! O Maria !
 Quæ sola inviolata permansisti.

Tantum ergo Sacramentum Veneremur cernui ; Et antiquum documentum Novo redat ritui Præstet fides supplementum Sensuum defectui.	Genitori, Genitoque, Læus et jubilatio : Salus, honor, virtus quoque Sit et benedictio : Præcedenti ab utroque Compar sit laudatio. Amen.
--	---

NIHIL OBSTAT.
 Brioci, die 15^a Octobris 1912.

J.-B. CARLUER,
 can. tit., censor ex officio.

IMPRIMATUR.
 Brioci, die 16^a Octobris 1912.

Y.-M. LE PENNEC,
 vic. gen.

TOLEN AR C'HANTIKOU

Dre renk al lizerenou.

N ^o	Pages.	N ^o	Pages.
152	Allaz! naoufe den kom- pren	9	Me gred ferm hep dou- tans ebet
56	Ar c'hentan mister tru- ezuz	5	Me ho salud, korf ma Zalver
97	Ar Vretoned 'n o euzen 37	22	Meulomp e peb amzer 10
—	Ave Maris stella..... 47	21	Meulomp ol da james. . 9
—	Ave verum..... 46	34	Ni ho salud, Rouanes an Ele..... 13
6	Bemde bemnoz..... 19	32	Ni ho salud, stereden vor..... 12
—	Breudeur ni glev..... 43	4	Ofromp d'an Env..... 1
87	Chilaouet gant spont hag eston..... 29	24	O Kalon zakr..... 11
—	De ma c'honfirmasion 44	42	O ma ine kanomp bem- de..... 16
11	Deut ol ha deut gant fe 5	13	O na hir eo an noz.... 4
85	Doe, gwir Bried..... 27	—	O salutaris..... 46
123	Eleiz a dud a gav kalet 41	8	O Zakramant ar c'hae- ran..... 3
14	Elet euz ar Barados.. 7	82	Poent braz eo d'ac'h, pec'her..... 26
37	Er c'hentan mister glo- rius..... 16	95	Setu aman d'ac'h eur reglen..... 35
12	Eun dezir braz am euz 28	2	Speret-Zantel..... 1
101	Eürus an hini a garo Doe..... 38	83	Selaou, ma breur ker. . 24
—	Inviolata..... 47	—	Tantum ergo..... 47
193	Jesus a lar d'imp pedi 39	68	Zant Josep, Pried Mari. 20
92	Jesus pegeñ braz e... 33	35	Zonjomp d'ar gentan dizenes..... 14
49	Kalon dous a Vari.... 18	89	Zonjomp, o kristenien. 31
70	Kanomp ol meulodi da Josep..... 22		
96	Karet Doe da gentan. 56		
76	Mam an Itron-Varia .. 23		

En enor d'ar plac'h Eürus Jeann d'Ark.

Ton kantik an Tolenou aman war lec'h.

Diskan.

O Jeann, c'houi ho peus delivret,
Dre nerz doue hon bro garet,
Deut eta c'hoaz da bargas pel,
Enehourien hon fe zantel.

1. Ia, goud ouzomp, pep zant en ne
An neus salloud digant Doue,
D'ober da viken, 'bars ar gloar.
Ar vad neus gret war an douar.

2. Plac'hik seitek vla, netra ken,
Oa Jared pe deuas a-ben,
Guelloc'h vit eun den a vicher,
Da ren armeou hon bro ger.

3. Ar zaon da gentan c'hoarze
O wetet plou ea eneb d'ea.
Mes prestik e skuillet daero
Jeann a drec'he warne hep tro.

4. Diou zantez, Mac'ha'it, Katel,
Ha gante 'n otro sant Mikel,

Hep paouez d'zi lavare,
Kement tia d'ober he dije.

5. Bro bet biskoaz war an douar
N'he deus bet eur c'hras ken
[dispar.

Bro Frans eta, bars an Envou,
Zo karet dreist an ol broiou.

6. Jeann d'Ark, henvet eus Hon
[Zalver,

Doa zevetaet he bro gen
Vestran ive, dre varo kri,
He doa he due d'achui.

7. Da gentan, dre 'r gomulion,
Kemeas Jezus 'n he c'ha'ou.
Ha gant he Doue kennezet,
C'hezas ar marohep spontehed.

8. Prestik eus kreiz an tan euzus
Krias gant nerz Jezus, Jezus!
Ha raktal, eun beteg an ne,
Hec'h he nijas gant Doue.

Kantik an Tolenou.

An ton zo merket dre 1, 2, 3, 4, etc., a dalve eol, la, si, do, etc.

Diskan.

1 4 5 6 7 5 6 4

Sellet pliz euz an tolenou.

4 6 7 8 9 7 8 6

Zo mellezor an ineou.

4 4 4 9 9 11 9 8

Hag a lavar da peb hini

8 9 8 7 7 8 7 6

Ar wulone hep damantl.

7 2 3 4

An eil tro... hep damantl.

1. Daou hent a zo, daou hent hep
[ken.

Em'ant 'figor dirag pep d'n
Hent an ifern, ha hent an ne,
Hent ar maro, hent ar vue.

2. Hent an ifern, frank ha ledan,
Dre ar pec'hed a gas dan tan

Darempredet eo bet ato
Gant kalz a dud, eioaz dezho!

3. Ourgoull, koler, lukar, avi,
A valited ha diegi,
Gant ar veventi milliget
A ra eleiz a dud daonet.

4. Bremañ so dac'h teurel evez,
Laket u s vad an ho p'ez;
Kol hoc'h me eo kol p'p' tra...
Re nizezat a ve lenva.

5. A greiz kalin, he hep gortoz
Kemeret hent ar barados,
Kumladet kren diouz ar pec'hed
Ha balest hep n'ec'h sbed.

6. Rug ganac'h e vezo Jezus,
Ha ganta e velet eürus,
Eürus er bed, dre nerz e c'hras,
Hag en Envou eürusoc'h c'hoaz.

CANTIQUES BRETONS

(4^e Edition)

EDITION COMPLETE NOTÉE, de 224 p. (couv. jaune)

Prix : 100 ex. cartonnées : 90 fr. » (Port en sus)
50 — — — 45 fr. »
12 — — — 12 fr. » P. poste recom. 14 fr. 50
L'exemplaire, 1 fr. franco-poste 1 fr. 30

EDITION ABREGÉE, de 116 pages (couvert. orange?)

Prix : 100 ex. brochés : 35 fr. » franco gare 37 fr. 50
13/12 — — — 7 fr. 80 franco recom. 6 fr. 05
L'exemplaire : 0 fr. 40 franco 0 fr. 50

EDITION SPECIALE pour les **Missions et Retraites**,
de 52 pages (couverture paille), 45 cantiques.

Prix : l'exempl. : 0 fr. 20 : franco : 0 fr. 30
les 100 ex. : 15 fr. » : franco gare 14 fr. 80

CANTIQUES FRANÇAIS

*Cantiques Français à l'usage des Missions, des
Paroisses et des Ecoles chrétiennes.*

Nouvelle édition augmentée de nombreux cantiques.

Edition notée (3^e édition.)

Prix : l'ex. broché : 1 fr. franco 1 fr. 15.
13/12 ex. — : 12 fr. franco recom. : 13 fr. 75.
100 ex. — : (sans 13^e) 90 fr. (port en sus).

Edition non notée (47^e édition.)

Prix : exemplaire : 0 fr. 50, franco : 0 fr. 60.
13/12 ex. : 8 fr. » P. franco recom. : 7 fr. 25.
100 ex. (sans 13^e) : 45 fr. franco gare : 47 fr. 50.